



Rener·ez skol kentañ derez (Landreger)

Kinnig labour embannet d'an / ar vendredi 07 mars 2025

Lec'h : **Landreger (22)**

Doare post **CDI** H/F

Gwengolo 2025

Deskrivadur ar post-labour

Da geñver raktres digoradur ur skol e Landreger (22), emañ Diwan o klask ur rener·ez skol kentañ derez.

Ouzhpenn ho kefridioù kelenn e vo fiziet ennoc'h atebegzh ar vuhez skol, al lusk pedagogel hag aozadur ar c'huzul-skol.

Kendivizer·ez ar familhoù e voc'h hag oberiant e voc'h e buhez ar skol hag he aozadur asambles gant an AEP (kevredigezh desevel poblek) a zo e karg eus merezh ar skol.

Ambrouget e voc'h en ho kefridi gant servij pedagogiezh ar c'hentañ derez ha kargadez a gefridi ho korn-bro a ambroug an AEP ivez.

Skiant-prenet ha barregzhioù goulennet

Oadet a 21 vloaz d'an nebeutañ

Bezañ tapet un diplom live 5 (BTS, DUT, DEUG, DEUST, etc.)

5 bloaz a skiant prenet renerezh, kelenn pe evezherezh en ur skol publik pe brevez.

Digor eo ar post-mañ d'an emstrivadurioù en diavez eus Diwan, d'ar skolaerien·ezed statud prevez, anvet « skolaerien·ezed titlet Diwan » hag ar skolaerien·ezed dindan statud gwazour·ez publik ar Stad, anvet « skolaerien·ezed DS ».

Resiset eo en notenn-mañ peseurt doareoù enfredañ (<http://www.diwan.bzh/documents/798>) a vo kinniget deoc'h hervez ho tegouezh.

Sellout ouzh ar c'hinnig : <https://www.diwan.bzh/br/offres-emplois/directeur-rice-ecole-primaire-treguier-070320251532>